

Lodenn 2: geopolitikerezh bedel abaoe 1945 Tem 1: ar brezel yen 1945-1961


-Goude an Eil-brezel-bed: Churchill : ar rideoz-houarn
-1947: blezad an torr: daou sell àr ar bed enebet : URSS ha SUA

AR BLOC'HAD AMERIKAN

- Prezidant amerikan Harry **Truman**: souten ar Stadoù a ya enep d'ar gomunouriezh (politkerezh an
- **Plañ Marshall**: adsevel Europa get an **OECE** (Aozadur europat evit ar c'henskoazell ekonomikel savet e 1948)
- Krouidigezh an **NATO**: Norzh Atlantic Treaty Organization: feur-emglev Norzh Atlantel sinet e 1950 etre Belgia, Kanada, Danmark, SUA, Frañs, RU, Gres, Island, Luksembourg, Norvegia, Izelvroioù....

AR BLOC'HAD SOVIEDEL

- >Gwengolo 1947: rentañ-kont **Jdanov**: souten an holl Stadoù a ya da vout komunist (demokratelezhioù pobl> en Europa Reterel)
- Krouidigezh ar **CAEM** (COMECON): Aozadur ekonomikel krouet e 1949 a vode URSS ha an demokratelezhioù gwerinel Reter –Europa.
- Krouidigezh ar **Pakt Warszawa**: Emglev milourel savet etre URSS ha Stadoù komunour Reter Europa e 1955.



II. Gouzout krouidigezh an ABU hag he c'hefridiou pennañ

Ganet eo an ABU e 1945 e San Francisco.

Paliou an ABU:

-Harpiñ ar peoc'h er bed en ur zoujiñ doc'h gwirioù ar pobloù

-Gwareziñ ar surentez etrevroadel.

-Lakaat ur c'henlabourerezh etrevroadel àr an dachenn ekonomikel ha sokial ha mab-den.

-Doujiñ doc'h gwirioù mab-den.

2. **aozadurioù** an ABU o fal dezhe eo sikour ar pobloù:

> FAO : aozadur evit ar magiñ hag al labour-douar

> OMS : aozadur hollvedel evit ar yec'hed

> UNICEF : aozadur an ABU evit ar vugale

Enkadennoù arall

> Brezel Korea (1950-1953)

blezad brezel 1950-1953: Korea Norzh, komunour, skoazellet get URSS a dagas en ur dremen an 38vet ledenn.

Korea Su: skoazellet get SUA edan gwarez an ABU. Kinnig a reas ar jeneral Mac Arthur implij ar vombezenn atomek àr Sian met TRUMAN, prezidant SUA, a skarzhas anezhañ. (URSS he deus ar vombezenn nukleel abaoe 1948).

Sinet e voe an arsav-brezel e miz gouere 1953. (2.5 milion a dud marv, gloazet..)

> Kuba : 1962

- misiloù nukleel soviedel staliet e Kuba (komunist get Fidel Castro)

- Kennedy (prezidant SUA) a c'houlennas groñs diget Khrouchtchev tenniñ anezhe hag e savas **ur blokus** tro-dro an enezenn.

-tost-tre da darzhiñ 3vet brezel-bed



Deiziadoù pouezus

1945: krouidigezh an ABU(ONU)

1947-1991: ar brezel yen

East 1961: moger Berlin

1989-1991: diskaret eo ar voger Berlin hag ar bloc'had komunist hag URSS

1957: feur-emglev Roma:krouidigezh ar KEE(Kumuniezh ekonomikel Europa)

1992: feur-emglev Maastricht : ganedigezh Unvaniezh Europa

2002: an Euro.

ABU: Aozadur ar Broadoù Unanet

Blokus: stankiñ hentoù daremprediñ ur gêr pe ur vro a-benn difenn dezhi mont e-daremprediñ get an diavaez pe bout pourvezet.

Brezel yen: mare a oa stank ha tenn-kenañ an darempredoù etre ar Stadoù-Unanet Amerika hag URSS etre 1947 ha 1961 hep ma vehe emgannoù àr-eeun etreze.

Rideoz-houarn: tro-lavar ar C'hentañ Ministr W. Churchill evit envel an harz arouezel a oa etre ar broioù reterel hag ar broioù ag ar bloc'had kornôgel hag a ranne Europa e daou damm betek 1989.

RFA: Republik federal Alamagn, Bonn ar gêrbenn

RDA: Republik demokratel Alamagn, kêrbenn : Berlin

Pakt Warszawa: Emglev milourel savet etre URSS ha Stadoù komunour a Reter Europa e 1955.

NATO(OTAN): Norzh Atlantic Treaty Organization: feur-emglev Norzh Atlantel sinet e 1950 etre Belgia, Kanada, Danmark, SUA, Frañs, RU, Gres, Island, Luksembourg, Norvegia, Izelvroioù.. Broioù ar bloc'had kornôgel.

Plañ Marshall: ur c'henskoazell ekonomikel savet e 1948 evit Europa ar C'hornôg

Demokratelezhioù gwerinel =demokratelezh pobl: broioù komunour Europa ar Reter a veze graet demokratelezhioù pobl doc'hte get URSS. Diktatourelzhioù e oant da vat.

Ar frank-eskemm: frankiz mont-dont evit ar marc'hadourezhioù, ar servijoù hep harz maltouterel d'ar bevennoù.

Ledanaat: digoriñ ar KEE hag UE goude da Stadoù nevez.

An distenn 1962-1975

Deroù ar c'henvevañ peoc'hiek

-Marv eo Stalin e-penn URSS e 1953

➤ An distenn a grogas etre an Daou Vras

➤ 1956: Nikita Khrouchtchev a ginnigas kenveviñ

Ha kavout un dachenn-emglev :ar c'henvevañs peoc'hiek (taliñ doc'h dañjer ur brezel nukleel.)

➤ ar c'hempouez dre ar spont("l'équilibre de la terreur": ober aon d'e enebour en ur sevel armoù(hini nukleel dreist-holl) , derc'hel a reas ar peoc'h en abeg e oa an aon bras bout distrujet get an enebour.

-Staliet eo un linenn bellgomz etre an Ti Gwenn hag ar Kremlin, ar pellgomzer ruz).

An distenn en e barr

➤ Tabutoù ha kenemglevioù etre an Daou Vras

➤ 1972: emglevioù SALT 1 a-benn herzel an armoù

➤ 1973-1975: Kuzuliadeg war surentez hag ar c'henlabour en Europa(CSCE) en Helsinki, Gouere 1973 get SUA, URSS hag ar Stadoù eus Europa(35) : doujiñ doc'h ar bevennoù ha nac'hiñ emellout en aferioù diabarzh.

An enkadennoù da vare an Distenn

➤ Saverezh Moger Berlin, 1961:

-RDA: skuizh da welet he annezidi kuitaat ar renad komunist en RFA, en ur dremen dre Berlin Gornôgel, a savas Moger Berlin (moger ar Vezh)

➤ Kuba : 1962 : tarzhus-tre eo; tost eo bet d'ar brezel nukleel strakal

- Fidel Castro, sosialour-komunour e-penn Kuba abaoe 1959 hag a gevred get URSS

- Staliiñ a ra URSS misiloù nukleel e Kuba get hedoù-tenniñ a c'hell mont betek Washington.

- Kennedy(prezidant SUA) a c'houlennas groñs diget Khrouchtchev tenniñ anezhe hag e savas ur blokus tro-dro an enezenn.

- Tenniñ a ra Khrouchtchev ar misiloù.

-Tost-tre da darzhiñ 3vet brezel-bed

Ar "brezel gouyen"(1975-1985: distro ar brezel yen ?

Met an 2 vloc'had a zalc'h da geveziñ da skouer e-barzh ar stourm evit **aloubiñ ar spas** . E 1969, ar c'hentañ den é kerzhout àr ar Loar eo amerikan (**Apollo 11 ha Neil Armstrong**)

E fin ar blezadòù 1970 e oa staliet misiloù get URSS en Europa Krogñ a ra en-dro an darempredoù stank: **darempredoù gouyen** etre an Daou Vras. URSS a stalias **euromisiloù : brezel an armoù adkroget.**

E 1983, Ronald Reagan a roas lañs da "**brezel ar stered**", programm evit sevel ur skoed enepbannelloù frammet diàr loarelloù aveet get skinoù lazer anvet IDS(Initiative de défense stratégique)

1979: kas a reas URSS bagadoù soudardel en Afghanistan=gourdrouz ar peoc'h.

Gorbatchev ha dispenn ar bloc'had soviedel er blezadòù 1990:

E-penn URSS e teuas **Mikhail Gorbatchev** e 1985; Buan a-walc'h e kroge-eñ get ur politikerezh ledan adreizhiadur a yae e-barzh an Istor edan anv a **b-Perestroika**, da lâret eo "adsavadur" pe "adframmadur", digoradur an ekonomiezh, demokratiziñ.

> 1987: Mikhail Gorbatchev , e-penn URSS abaoe 1985 a sinas get Ronald Reagan(Prezidant SUA) emglevioù disarmiñ e Washington

Diskaret eo ar gomunouriezh e Reter Europa:

>1989-1991: Europa Reterel en he zoull: achumant ar renadoù komunist

9 Du 1989: kouezhet eo moger Berlin

1990: Alamagn adunvanet

>1991: 15 Republik en URSS a ziklêrias o emrenezh

Ganedigezh Rusia

FIN AR BREZEL YEN

SUA: "jañdarmed ar bed"


**Blokus Kornôg-Berlin
1948-1949**

**Tec'het kuit a rae an
Alamanned ar Reter
1949-1961**

**Moger Berlin
1961-1989**

**Dispenn ar Voger Berlin
hag adunvanet eo
Alamagn 1989-1990**

**ALAMAGN HA BERLIN DA
VARE AR BREZEL YEN**



E 1948, a-benn enebañ doc'h bodadenn an tri zakad dalc'het a broioù ar C'hornôg, he doa savet URSS **ur blokus** en-dro da Verlin evit enebañ doc'h an diviz-mañ ha stankiñ an hentoù daremprediñ.

Etre 1949 ha 1961 etre **2.6 ha 3 milion a Alamanned a RDA o doa tec'het kuit, en ur dremen dre Gornôg Berlin.** Emañ dreist-holl ur boblañs yaouank, oberiant, ar pezh a gas ur gudenn ekonomikel bras evit an RDA hag a vank ur dorn-labour.

Divizet he doa RDA, skoazellet get URSS, a-benn paraat d'an dud da vonet kuit, **sevel ur voger 155km hirder en-dro da Gornôg Berlin e miz Eost 1961.** **Arouez ar brezel yen** eo ar Voger Berlin hag arouez ar bed rannet e daou vloch'ad.

D'an **9 a viz Du 1989** e voe **dispennet Mogor Berlin** hag e 1990 e voe **adunvanet Alamagn.** Diskaret eo ar gomunouriezh e Reter Europa .

BERLIN: ar blokus soviedel 1948-1949
1945: rannet eo Alamagn ha Berlin trec'het e peder zonenn(e kornôg ar zonenn c'hall, saoz hag amerikan) hag e reter ar zonenn rus.
1948: bodet eo ar zonennoù dalc'het e kornôg etre ar R-U, SUA ha Frañs
>1948: a-benn nac'hiñ d'ar fed e oa bodet an tri zakad, ar Soviediz a ziviz kontroliñ Berlin gornôgel : staliadenn ur blokus tro-dro Berlin gornôgel.
➤ **Pont kirri-nij** a-benn pourveziñ an annezidi é chom e Berlin gornôgel
➤ Stalin, goude ur blez a zivizas tenniñ e vagadoù soudarded ag an Arme Ruz
➤ An disoc'h: 1949: rannadur Alamagn e daou
RFA: Republik federal Alamagn , Bonn ar gêrbenn
RDA: Republik demokratel Alamagn, kêrbenn : Berlin

➤ **Saverezh Mogor Berlin, 1961:**
-RDA, skuizh da welet hec'h annezidi é tec'het kuit doc'h ar renad komunist en RFA(etre 2.6 milion ha 3 milion) en ur dremen dre Berlin Gornôgel, a zivizas a-benn herzel da vonet kuit, da sevel ur voger 155 km hirder en-dro da Gornôg Berlin e miz Eost 1961.
E-pad an noziad **12 ha 13 a viz eost 1961** e voe serret an hentoù daremprediñ etre etre Berlin-Reter ha Berlin-kornôg en ur lakaat orjalenoù get RDA. Àr-erlec'h e voe kroget ar voger. 5075 den zo daet a-benn da dreuziñ ha tec'hout kuit eus Berlin ar Reter ha 588 den zo marv. N'eus eskemm ekonomikel ebet ken etre an 2 Verlin: 63 000 berlinad a reter a goll o labour e kornôg Berlin ha 10 000 den eus Berlin ar C'hornôg a goll o labour.
Familhoù zo bet dispartiet e-pad 28 blez. D'an 26 a viz Even 1963 e Berlin e tiskuilhas(dénoncer) John F. Kennedy, prezidant ar SUA , ar voger-mañ é lâret "Ich bin ein Berliner".
A-dal ar blezadour 1980 e voe an'**Ostpolitik** da lâret eo un digoradur àr ar Reter get ar c'hornôg. (Willy Brandt , chancelier de RFA)
➤ **9 aviz Du 1989: dispenn ar Voger Berlin:** digor eo ar bevennoù etre RFA ha RDA
1990: Alamagn adunvanet:
Savet get Valeri Nicolas
>1991: 15 Republik en URSS a zisklêrias o emrenerezh: ganedigezh Rusia ha fin ar bloc'had komunist.

L'UNION EUROPÉENNE



L'UNION EUROPÉENNE EN 2013
 28 Etats membres
 Population : 506.7 millions d'habitants
 Superficie : 4 385 549 km²
 24 langues officielles



CONSTRUCTION EUROPÉENNE LES ÉTAPES :




Pays candidats à

BULGARIE (B)
 MACÉDOINE (M)
 ROUMANIE (R)
 TURQUIE (T)

Pays potentiels

ALBANIE (A)
 BOSNIE-HERZÉGOVINE (BH)
 SERBIE (S)



- | | |
|-------------------------------|---------------------------------|
| Bruxelles
BELGIQUE | Vilnius
LITUANIE |
| Sofia
BULGARIE | Luxembourg
LUXEMBOURG |
| Prague
REP. TCHÈQUE | Budapest
HONGRIE |
| Copenhague
DANEMARK | La Valette
MALTE |
| Berlin
ALLEMAGNE | Amsterdam
PAYS-BAS |
| Tallinn
ESTONIE | Vienne
AUTRICHE |
| Dublin
IRLANDE | Varsovie
POLOGNE |
| Athènes
GRÈCE | Lisbonne
PORTUGAL |
| Madrid
ESPAGNE | Bucarest
ROUMANIE |
| Paris
FRANCE | Ljubljana
SLOVÉNIE |
| Zagreb
CROATIE | Bratislava
SLOVAQUIE |
| Rome
ITALIE | Helsinki
FINLANDE |
| Nicosie
CHYPRE | Stockholm
SUÈDE |
| Riga
LETTONIE | Londres
ROYAUME-UNI |



Perak kenlabourat goude an Eil Brezel-bed?

- a-benn parraat ur brezel gall-alaman arall.
- a-benn en em zistagiñ doc'h an daou vloc'had.
- Adsevel Europa rivinet ha rannet get ar Brezel yen.
- A-benn en em wareziñ doc'h ar gourdrouz soviedel.

Saverezh europat

1951: krouidigezh CECA (àr intrudu Jean Monnet ha Robert Schuman): Kumuniezh Europa evit ar glaou hag an dir. Lakaat a ra boutin produadurioù glaou ha dir Frañs, RFA, Italia ha Benelux.

1957: feur-emglev Roma:ganedigezh ar KEE(CEE): Kumuniezh ekonomikel Europa pe Marc'had boutin. Torret eo tamm-ha-tamm ar c'hlouedoù maltouterezh.1992: Feur-emglev Maastricht(KEE>UE)

Prantadoù pennañ saverezh Europa

1951: CECA

Kumuniezh Europa evit ar glaou hag an dir

(Communauté européenne du charbon et de l'acier)

6 bro a Europa ar C'hornôg

1951: 6 bro a Europa ar C'hornôg a ziviz unaniñ: **Frañs, RFA, Italia ha Benelux**(Belgia, Luksembourg, Izel-Vroioù)

Palioù

- Lakaat a ra boutin produadurioù glaou ha dir
- Frankiz mont-dont evit ar glaou hag an dir

1957: feur-emglev Roma KEE Kumuniezh ekonomikel Europa

6 bro goude 12

1957: ar C'hwec'h bro ag ar CECA

1973: **R-U, Danmark hag Iwerzhon**

1981: **Gres**

1986: **Spagn ha Portugal : Europa an 12**

Palioù

- Kas àr-raok un diorren ekonomikel ha sokial etre ar pobloù
- Kas àr-raok ar peoc'h hag ar frankiz
- Krouiñ ur marc'had boutin
- Sevel **politikerezhioù boutin evit al labour-douar boutin(PAC)** pe evit an energiezh hag an trañsport (Kumuniezh Europa an energiezh atomek pe Euratom).
- Torriñ ar skoilhoù evit ar c'henwerzh, kas àr-raok ar frankeskemm da lâret eo **ur marc'had diabarzh bras** ma c'hell ar marc'hadouriezhioù, ar servijoù hag an dud mont ha dont frank

1992 : feur-emglev Maastricht Unvaniezh Europa

12 a 28 bro ezel

1995: **Sweden, Finland hag Aostria: Europa ar 15.**

2004: broioù a kreiz ha reter Europa dieubet doc'h ar beli komunist:**Kiprenez, Estonia, Latvia, Lituania, Malta, Polonia, Republik tchek, Slovakia, Slovenia, Hungaria: Europa ar 25**

2007: **Roumania, Bulgaria: Europa ar 27**

2013: **Kroatia: Europa An 28**

Palioù:

- Kas àr-raok un egor monedone frank evit an dud er Stadoù o doa sinet an emglevioù Schengen.(1995).
- Sevel ur **moneiz boutin: euro**
- krouidigezh **ar geodedourezh europat** a ro muioc'h a wirioù da izili UE.
- Krouidigezh **Karta ar gwirioù diazez:** testeni get un dalvoudegezh wirel, bodet eo enni an holl wirioù keodedel, politikel, ekonomikel ha sokial o deus keodedourien Europa.